

---

Ton anvezet: *Tud an èro*

# **GUERZEN SANTÈZ BARBA**

Enoret e parèz er Faouët

—•1861•—



# GUERZEN SANTÉZ BARBA

Enoret e paréz er Faouët

---

Ton anevezet : *Tud an èro.*

## DISKAN

Santéz Barba dirak Doué,  
Bézit sonj eus ho pugalé :  
Diouz an tan, ar maro subit  
Diouz ar gurun, hon dihoallit,  
Hon dihoallit.

## I

Ar santéz-ma zo pennehérez,  
Leun a vadou, leun a zanzéz ;  
Mes hé zad a zo eur païen  
Enebour bras d'er gristenien,  
D'er gristenien.

En é baléz, an Idolou  
 a resévé kalz énorioù;  
 Mes gant Doué sklérijennet,  
 Barba dézhé né zoujé ket,  
 Né zoujé ket.

En despet d'hé zad kounaret,  
 Ar verh iaouank zo badézet;  
 Tridal a hra en hé frizon  
 Séder, eurus éo hé c'halon,  
 Eo hé c'halon.

Diskar a hra an Idolou,  
 O bruzuma gant hé boutou :  
 « Ra vezoc'h dré holl distrujet  
 ha gant an dud, holl forbannet,  
 holl forbannet ».

Pa vel an é di diskaret  
 An Idolou ganthan savet,  
 Ken a vo é verh kastizet  
 Tad hor zantéz ne c'hel kousket  
 ne c'hel kousket.

Evel eur bleiz o iudal,  
 E saillas var Barba raktal :  
 Dré an dréj, ar spern hé stléjas  
 Didan é dreid, ean hé sterdas,  
 Ean hé sterdas.

Kerkent hé c'horf zo dispennet  
 Gant kribinou hir ha kalet :  
 Ar verzeréz a zo eurus  
 Da c'houzanvi vit hé Jézus,  
 Vit hé Jézus.

An tyrand nac'het gant Barba  
 A roaz urs d'hé dibenna :  
 Ar santéz ne hra van ebet,  
 Ha d'ar maro dispount a réd,  
 Dispount a réd.

O tra euzus da lavaret  
 Ha spontus da veza elevel :  
 Hé zád bourréo er c'hruella  
 An em génig d'hé dibenna,  
 D'hé dibenna.

Kerkent é dorfet achuet,  
 An tad multrér zo kastizet :  
 Eun tarz-kurun, spontus ha kré  
 Her pulluc' has a ~~berz~~ Doué,  
 Aberz Doué.

Vit é nori Santéz Barba,  
 Evel d'o mam Santéz Anne,  
 Meur a chapel én dro d'ar bod  
 Er gristénien ou deus savet,  
 Ou deus savet.

Er Vretoned ével bépred  
 Ar boblou al ou deus trec'het :  
 Tost d'ar Faouët, na Kaer Paléz  
 Ou deus savet d'o fatronéz,  
 D'o fatronéz.

Ama an holl a zo dézhi  
 An holl o deuz fians enhi,  
 An dén koz o vont da vervel,  
 Ar bugulig en é gavel,  
 En é gavel.

Santéz Barba, hor Patronéz  
 Dale'hit eñ feiz, en hor bro géz :  
 Goulennit ma chommp bepred  
 Guir Vretoned, pennou kalet,  
 Pennou kalet.

Hon tud koz o deus ho karet  
 Hag é peb amzer ho meulet :  
 Ni ho pedo mintin ha noz  
 Evit mont holl d'ar baradoz,  
 d'ar baradoz.

HERVEZ J. M. DERRIEN  
 Quimper, 8 Guengelo 1891  
 mat dévouit moulet  
 F. OLLIVIER VIC. JÉN.





---

Ton anevzet: *Tud an èro*

# GUERZEN SANTÈZ BARBA

Enoret e paréz er Faouët

—•••••—  
*Corrections, en vue d'une  
nouvelle édition.*

---

alla beniget  
me: Mariae Karol,  
Jont ar Venzen  
Levi, 9a rivikay

2. Cant.

Brigitte

ANNE.

et glori

-Notre maître

com. Prudely

3

Victor-

2 variante: Diskan

all serait. Celan de p. 2

ante serait Diskan p. 4.

# GUERZEN SANTÉZ BARBA

Enoret e paréz ~~er~~<sup>a</sup> Faouët

*ar verr kor.*  
Ton ~~anevezet~~ *Tud an èro.*

. DISKAN

Santéz Barba dirak Doué,  
Bézit sonj eus ho pugalé:  
Diouz an tan, ar maro subit,  
Diouz ar gurun, hon dihoallit.

1

Ar santéz-ma zo pennehérez,  
Leun a vadou, leun a zanzéz:  
Mes hé zad a zo eur païen,  
Enebour bras d'ar gristenien.

En é baléz, an Idoullou  
 A resévé kalz énorïou ;  
 Mes gant Doué sklérïjennet,  
 Barba dézhé né zoujé ket.

En despet d'hé zad kounaret,  
 Ar ver<sup>ch</sup> iaouank zo badézet ;  
 Tridal a ~~h~~ra en hé frizon ;  
 Séder, eurus ~~o~~ hé c'halon.

Diskar a ~~h~~ra an Idolou  
 O bruzuna gant hé boutou :  
 « Ra vezoc'h dré holl distrujet  
 Ha gant an dud holl forbannet ! »

Pa vel ~~o~~n é di diskaret  
 An Idolou ganthan savet,  
 Ken a vo é ver<sup>ch</sup> kastizet  
 Tad hor zantéz ne c'hel kousket.

*ch /*

*Hemel eur eur blei*

~~Evel eur bleiz~~ o iudal,

E saillas var Barba raktal :

Dré an dréj, ar spern hé stléjas

Didan é dreid, ean hé sterdas.

Kerkent hé c'horf zo dispennet

Gant kribinou hir ha kalet :

Ar verzérez a zo eurus

Da c'houzanv ~~mit~~ hé Jézus.

*evit /*

An tyran ~~nac~~ het gant Barba

A roaz urz d'hé dibenna :

Ar santéz ne ~~tra~~ van ebet,

Ha d'ar maro dispount a red.

O tra euzus da lavaret

Ha spontus da veza klevet :

Hé zad bourréo ~~ar~~ c'hruella

~~An em~~ génig d'hé dibenna.

*/ An em*

Kerkent é dorfet achuet,  
 An tad multrér zo kastizet :  
 Eun tarz-kurun, spontus ha kré  
 Er pulluc' has abez Doué.

**J**Vit é nori Santéz Barba,  
 Evel d'o mam Santéz Anna,  
 Meur a chapel én dro d'ar bed  
**A**r gristénien ou deus savet.

**A**r Vretoned, ével bépred,  
 Ar boblou al ou deus trec'het :  
 Tost d'ar Faouët, na kaer Palèz  
 Ou deus savet d'o fatronéz.

Ama an holl a zo dézhi,  
 An holl o deuz fians enhi,  
 An dén koz o vont da vervel,  
 Ar bugelig én é gavel.

Santéz Barba, hor Patronéz,  
 Dale'hit ~~an~~ <sup>ar</sup> feiñ, én hor bro géz :  
 Goulennit ma chomfomp bepred  
 Guir Vretoned, pennou kalet.

Hon tud koz o deus ho karet  
 Hag é peb amzer ho meulet :  
 Ni ho pedo mintin ha noz  
 Evit mont holl d'ar baradoz.

*Hervez kantik  
 an Aulion J.M.D. - (Rosko)*

Hervez J. M. DERRIEN  
 Quimper, 8 Guengolo 1891  
 Mat devout moulet  
 F. OLLIVIER VIC. JÉN.



